



RECIT

*Eus ar maleur horrubl digüezet gant an drivet
babailhon eus an unnevet regimant leger o tre-
men pont orjal Anger, vardro unnec heur anter
eus ar mintin, ar meurs. 16 eus a vis ebrel 1859.*

(Calk a Vreloant a rqa en e zoues.)

Var ton Cantic Christ bras ar Vur.

O Doue! Mestr souveren, Doue trugarezus,
Deut d'am c'helen, me hoped, var eun darvoud
eüzus...

Eul lincel a gañn, allas! zo stignet var ar Franç!
Ennoc'h hepqen, va Doue, e mâ hon esperanç.

- Abaoue darvoud eüzus eus ar Berezina,
Ne glêvjot, dre c'haç Doue, comz demeus eür
seurt tra;

Mes ar maleur diveza a zigas s'ouj ouz se,
Hac a ra-stracl' pep calon ha frailla peb ene.

Va breudeur qer Bretonet, demeus a bep
contre,

Deut da guemesq ho taelou hirio gant va re-me;
Deut da zelaou eur recit gant calz antantion,
Zo eur sujet a c'blac'har da bep christen gürion.

D'armeurs, c'hoezeca ebrel, eun nebrüt qent
creiz-de,

Er guær demeus a Anger calz a dud a rede
Da velet oc'h èruont an drivet bataillon
Eus an unnevet leger, ar joa en o c'halon,

Eur pont hir bras neud orjal a voa da basseal,
Ha qerqent ar vataillon zo èt varnàn ractal.
An avel a voa spontus, ober a nè gloe bras,
Ar rivier voa furorus ha térrubl he fourgas.

Er penn eus ar vataillon voa'n tabourinerien,
Ar saperien, et music, hac ar voltijerien;
A boan o d'qe ar re-mâ quüttèt diyar ar pont
Ma clèvjot criadennou a gargue oll a spont;

Eurstracl ar spouronnussa a voe ractal clèvet:
Penn ar pont zo difframmet gant stronç ar zou-
dardet,

Ha prim vel eul luc'heden eo coçet gant furor...
O ya Doue beniguet! ô na goassa horror!

Dre ma coee ar re aroc en dour a rencadou,
 Rencou all a ziruille var ar vayonetezou,
 Hac ar c'hoatach eus ar pont a goee varneze,
 A rê dê en fonç an dour caout ar maro neuze.

Rac ar pont voa arpez, evel eursqeul harpet:
 Ar penn d'an nec'h na elle delc'hel muiden abet.
 Ar penn d'an traon, dizac'het, voa en fonç ar
 rivier.

O Doue, pebes arvest ha pebes dizesper!

Ne allent qet, an dud paour, miret dont da
 vervel

Pe var bayonetezou p'en dour : ô stat cruel!
 Ar c'hri hac an dizesper a voa eno dre oll,
 O velet qement a dud eno ouz en em goll.

Ar renc divea voa tost da benn ar pont chomet,
 O vont adre prontamant int en em sovetet:
 Er pas hep qen, hac e voant diruillet er rivier,
 Evel, maleürusamant, o c'hamaradet qer.

Oll habitantet Anger zo diredet eno
 E vit sicour an dud paour d'achap ouz ar maro.
 Courach, Angevianis! courach, tud jenerust
 Doue a recompanço hoc'h actou vertuzus.

En em gavet zo ive calz a seurezet-gris,
 Goaset, graguez, bugale, ha nombr tud a illis:

Ar re-mâ n'em zivouisqe eus o zoutanennou
Da c'holo an dud blesset gant ar brassa soignou.

Colhejou, orillerou, tapisou ha diflat
A zigasset d'an dud paour a ellet sovetat :
An oll en em ampresse gant ar brassa sourci.
Da gass gante an dud qez da soigni en o zi.

Ar vagueyer gant courach a yê a bep coste
Gant bagou da zovetat an dud qez a veuze.
Eürus voent, dre c'hraç Doue, mes gant calz
poan eus,
Evit dont da breservi nombre tud eus ar maro.

A vernou' ruill an dud paour, treinet dre nerz
an dour.

Crappet an eil d'eguile, o crial d'o zicour ;
Mes fourgas ar goaguennou a zepar aneze,
Hac e zint a nebeudou, allas ! beuzet neuze.

Sonjit er maleur horribl, va breudeur Chris-
tenien :
An nombre eus ar re veuzet zo tost da dri c'hant
den !!!...

Sonjit ivez er glac'har zo en o familhou :
Ar Franç oll a dle qemer calz pers en o c'hanvou.

Impossibl eo niveri ar actou jenerus
O deus bet lec'h en andret an dud qer maleürus :
An oll voa leun a galon evit douguen sicour
D'an dud voa a vandennou treinet gant nerz an
dour.

Gonscoude na ellomp qet dont da devel amâ
 Actionou a gourach zo deus ar re gaera :
 Mont a reomp-ta bremâ da rei d'anaveout,
 Ar re ar principala hon eas elfet gourzout.

Eur soudard courajus bras eus ar re sovetet,
 Qerqent var bord ar rivier zo en em divouisqet,
 Hac en deus sañhet buan ebars en dour neuze,
 Ha da galz e yignonet e rentas ar vue.

En toger eus a Anger, Targis en e hanver,
 En em stlapas er rivier, hep aoun rac an danjer,
 Hac en deus sovetet, dre ar boneur brassa,
 Calz a dud voa var ar poent eno da berissa.

An autrou Loup, letanant, en deus sovetet
 Deg dea demeus ar maro, a voa cazi beuzet ;
 Ar jandarm hanvet ar Reinch, peuzecazovetas,
 Hac eun abouriner-mestr, pemp, dre eur bo-
 neur bras.

An autrou Rousseau, oalve, en deus seiz so-
 vetet,
 Hac ar baguer Peruvier en e vag tri tennet ;
 Eur martolod a bos daouzeo prest var ribl ar
 rivier,
 Hac eur plac yaouanc a drapen dour un officer.

Ar jandarm hanvet Briquet, en eur vag antreet,
 Ha crog stard endro dezi calz tud desesperet,

A ra e oll effortchou vit er vag o zenna,
Mes an dour voa furoret : ret eo dè perissa!...

Eur gantinierez ive deus an dour zo tennet,
Mes e daoa buguelic paour, sivoas, a zo beuzell.
Anfin, oll, bras ha bian voat eno courajus
Da ròi ar brassa sicour d'an oll dud maleürus.

An officerien Dore.(1), Collez ha Carrette,
Furguez, ar Bries ive zo privet a vue;
Ar porte-drapo, allas! a zo ive beuzet
En eur derc'het e drapo en e zaouarn serret.

An drivac'h a vis ebret pegnement e voa cri
Güelet cant pèvar-uguent soudard da entèri!...
Seiz chariot varnuguent carguet a dud beuzet :
Ar spouron en peb calon voa eno antreet.

Oùbèleyen-eus ar vro voa en antèramant;
An oll autoriteou a voa ive presant,
President ar Republic ha ministr ar brezel,
Hac eun niver bras a dud hac a dost hac a bell.

An oll staliou en Anger en deiz-se voa serret;
Ne velet a bep coste nemet tud glac'haret.
Calz a c'braguez a veljot o vouela stanc ha druz;
O sònjal en famillou an dud qèz maleürus.

Er plaç m'eo bet ar maleur e devoa ar rivier
Peur-gomunamant atao trêgont troatad doun-
der,

(1) Dore, Breiziad, guinidic eus Goengamp.

Hac ar pont tri-c'hant troatad hirdet a uz d'an
dour:

Penos-eta achappi? penos caout nep sicour?

Cant-tri-uguent den a zo en hospital, sivoas;
Mes cavet vo 'a greder corfou tud beuzet c'hoas:
An dour, hep mar, a dolo souden var ar riblou
Demeusan dud maleürus calz demeusa gorfou.

Presidant ar Republic en hospital zo bet
O visita'r zoudardet a voa bet sovetet,
Hac e zeo bet generus ebars en o andret;
Ar peza zouças o foan d'ar paour qez tud blesset.

Daou devez goude'r maleur voa en em ras-
samblet

En eur c'hourt bras a Anger ar re yac'h sovetet:
Neuze vœ grêt an appel; mes allas! va Doue,
Arrencou avoa goalsclêr: an darn vras a vanqe.

Gant pebes carante vras eno ar zoudardet
A boc an eil d'eguil, carguet a denerdet!
O daoulagad leun daelou, e lavarent neuze:
Camaradet! mignonet! rentomp grac da Zoue.

En oll guæriou hac ive en oll rejimant chou
E vo, hep dale nemeur, grêt souscriptionou
Evit souten famillou an dud qez maleürus:
Ni ive ta, Bretonet, bezomp oll jenerus.

Entrezomp-ni, Bretonet, aïao gûir gristen-
 nien,
 Adressomp oll da Zoue hirio peb a beden
 Erit an dud maleûrus zo preiz d'eur maro cris,
 Ha layaromp exite pep a *De profundis*.

O va Zalver adorabl! recevit da repos
 Ar viellhaou maleûrus en gloar ho Parados;
 Grit rës en o famillon ar gonsolation,
 Hac en horbrô goera Franc ar peoc'h, an unioa.

F I N.



E Montroulez, e ty LÉDAN, Impr.-Libret.